

## KANTIK DA ZANTEZ BARBA

( Ton: "Ni ho salud, stereden

## I

Ar zantez-ma zo penherez  
 Leun a vadou, leun a zanvez  
 Mez ha zad a zo eur païen  
 Enebour bras d'ar gristenien

MEULOMP HOLL GANT JOA

MEULOMP SANTEZ BARBA

## II

En he balez an idolou  
 A reseve kalz enoriou  
 Mez gant Doue sklerijennet  
 Barba d'ezo n'e zouje ket

## III

En despet d'he zad kounaret  
 Ar vero'h iaouank zo badezet  
 Tridal a ra en he frizon  
 Seder hag eurus he c'halon

## IV

Diskar ara an idolou  
 Ho bruzuna gant he boutou  
 Ra vezoc'h dre holl distrujet  
 Ha gant an holl dud disprijet

## V

Pa wel en e di diskaret  
 An idolou gantan savet  
 Tad hor zantez ne c'hel kousket  
 Ken a vo e vero'h kastizet

## VI


Evel eur bleiz en eur iudal  
 E sailhas war Barba raktal  
 Dre an drez, ar sern he skleggas  
 Ha dindan e dreid e bressas

## VII

O va zad kor, eme Varba  
 Ar galloud ho peus d'am-laza  
 Da Jezuz, d'e lezenn santel  
 Me vo fidel beteg mervel

## VIII

Perak, va merc'h, ne zentit ket  
 Ouz al lezen am eus douget  
 Ha perak chom heb adori  
 Dou-e-ou bras Nikomedi.



## IX

Biken, biken n'o adorin  
 Na dirazo n'a zacoulinin  
 Va flijadur a vo diskar  
 Idolou mud, dall ha bouzar

## X

He zad neuze he chadennas  
 Da di ar barnar her o'hasas  
 Evit galloud dre dourmanchou  
 Mouga buhan he c'hredennou

## XI

Kerkent he c'horf zo dispennet  
 Gant kribinou hir ha kalet  
 Ar verzerer a zo eurus  
 Da c'houzanv evit he Jezuz

## XII

An tyrant nec'het gant Barba  
 A roas urz d'he dibenna  
 Ar zantez ne ra van ebet  
 Ha d'ar maro dispont a red

## XIII

O tra euzus da lavaret  
 Ha diez da veza kredet  
 Piou zibenno santez Barba  
 He zad a c'houlenn he laza

## XIV

Kerkent e dorfet achtet  
 An tad kriz a zo kastizet  
 Eun tarz kurun, spontus ha kre  
 Er puluc'has abet Doue

## XV

Santez Barba dirak Doue  
 Bezit sonj eus ho pugale  
 Diouz ar gurtin hon diouallit  
 Diouz an tan, ar maro subit.

(Imprimatur:  
 Quimper, 2 Juillet 1948)